

Kurunen Aour ha Perlez

ANN ITROUN VARIA REMENGOL,

Kurunet ann 30 a viz mae 1858,

ENN HANO HON TAD SANTEL AR PAB PII IX.

Breizh, pedomp holl
Gwerc'hez Remengol !!!...



Da nep he fed gant feiz
He ro grason eleiz !!!.

Nep a bed Gwerc'hez Remengol
Birviken-n'en dai da goll !!!..

War don : *Kloarek Remengol.*

I.

Gloar da Zoue enn envou, gloar d'ann Dreindet santel
Gloar da Werc'hez Remengol, Patrounez Breiz-Izel.
Meuleudi dit, bro ar sent, Arvor douar kalet,
Bepret e kaver enn-out feiz, enor, brezounek!

Doue Breiziz hon tadou , roit d'in sklerijen
Ra savinn eur werz nevez da Vamm ar gristenien.
Rouanez vraz Breiz-Izel a vezo kurunet
E Remengol , leac'h euruz , gant ar Werc'hez karet.

Diskennit diouc'h ann envou , sperejou evuruz ,
Deuit holl war ar c'houmoul gant ho telen skleriuz ;
Grit d'imp klevet ho moeziou karget a veuleudi,
Ha kanit gan-imp ive gloar hag enor Mari !...

Sant Kaourintin ha sant Paol , sant Tual , sant Briek ,
Sant Patern , sant Malani , Graveran ha Tadek ;
Sant-Samson , sant Judual , sant Weltaz , sant Malo ,
Deuit da welet kuruni *Rouanez vraz hor bro* !...

O Grallon ! roue kear Iz , roue koz ann Arvor ,
Ho pobl a zo c'hoaz kristen , leun a feiz , a enor ;
Pa savo heol ann Dreindet , deuit gant Gwenole ,
War Menez-C'hom da welet kuruni mamm Doue !...

Kemerit c'hoaz ho telen , Barzet ann amzer goz :
Savdiouc'h da vez , ôGwen-C'hlan , barz braz hervez ar goz.
Taliezin ha Marzin , tostait d'ar Porz-Gwenn :
Grit ra zifuno Gwenn-C'hlan , ra gavo he delen !...

Ha c'houi , kristenien leal , pelerinet santel ,
Savit holl diouc'h ho peziou me a zeu d'ho kervel
Da zonet da Remengol , da zont enn eur gana
Evit gwelet kuruni ann *Itroun Varia* !!

Ha c'houi tud vraz ann douar , rouane ha prinsed ,
A ioa gweach-all o sturia ar Vretounet kaled ;
Rouanezet hon tadou , ha c'houi *Dukex Anna* ,
Dont a refot da welet peger braz eo hor joa !!

Brezelidi kalounek , ha c'houi merdeadet
 Oc'h euz e-pad ho puez e Remengol pedet ;
 Hastit sevel diouc'h ho pez , ha dont ive d'ar gwel ,
 Ar c'haëra en deuz gwelet hor bro ger Breiz-Izel !...

O c'houi, peorien Jesus-Krist, a zo bet trubardet,
 Oc'h euz bet da c'houzanvi ann naoun hag ar sec'het :
 C'houi pere holl a zo bet poaniet war ann douar,
 Deuit da welet ann hini a sec'he ho klac'har !...

Deuit , tud diwar ar mor , tud a enez Sizun ,
 Denit a enezen Heusa , ra na choumo nikun ,
 Deuit a enez Molenez , deuit a enezen Vaz ,
 A Wenet , Kerne , Treger ho pedann da zont c'hoaz !...

Laboused *koat ar Rannou* , digorit ho askel ,
 Ha kemerit holl ho nij da vont d'ar broiou pell ;
 Treuzit , hep aoun , ar mor braz , ha livirit d'ann holl
 Dont da welet kuruni *Patrounez Remengol*...

Nep en deuz c'hoant da c'houzout petra a vezo gret
 A ve ret d'ezhan gwelet *ne-ket awalc'h* klevet
 Peger kaer vezo ann deiz ha peger sklear ann noz :
 Remengol na vezo ken nemet eur baradoz !!!

Pegen euruz ar c'hristen a vo eno neuze ,
 Hag enn iliz daoulinet dirag *Gwir Vamm Doue* !
 Daerou a garantez hep paouez a skulio
 Pa welo e Remengol joausded ann envo !!!

II.

Savet eo heol ann Dreindet , heol teir gweach santel ;
 Ann douar zo goloet gant he c'haera mantel ;

Breman, labousedigou, kanit er gwez huel,
Ho soniou koant da Vari, merc'h ann Tad Eternel !

Ar mör braz a zo kousket ; ann env a zo digor,
Hag ar sent hag ann ele a sell ouc'h ann Arvor.
Doue a lavar d'ezho : « Ma bugale, gwelet
» An enor a rear hirio d'am *Mamm muan karet*.

» Klevit kleier Remengol ; he mant holl o vralla ;
» Klevit-ho o lavaret : *Ave Maris Stella...*
» Gwelit c'hoaz bugale Breiz o kana enn henchou
» Errou da bedi ma Mamm da blas *Ru-Mean-Goulou*.

Sellit breman, kristenien, eunn arvest ar c'haera,
Biskoaz den war ann douar ne welaz ker kaer tra ;
Chetu kroaz sant Kaourintin hag he vaniel ive,
E-penn ar prosesioun gant re sant Gwenole !..

Salud, banielon santel, banielou sent ma bro ;
Salud, baniel Kaourintin, gant joa me'z kwel ato ;
Salud deoc'h pelerined a bevar c'hourn ar bed ;
Salud Iliz Remengol, salud, *Gwerc'hez vrudet*.

Ne oamp nemet bugale pa oe d'imp lavaret
Pedi ac'hanoc'h bemdé, *Gwerc'hez ar gwir Remet !*
Ia, c'hoaz evel eligou, kousket enn hor c'havel,
Ni zouge war hor c'haloun ho medalen santel !!!!..

Pet gweach hon deuz ho kwelet enn ho iliz hep par?..
Mez hirio vad ho kwelomp evel eunn heol a bar...
Deuit eta da vale, gant ho sae alaouret,
Da welet bobl Breiz-lzel ouc'h ho treid daoulinet !..

Deuit breman, *Rouanex*, deuit er meaz ho ti
Da gemer hor c'hurunen, ni a zeu d'ho pedi ;

D'eoc'hu he-z-eo digaset gant *Pastor ann Iliz* ;
Lezit kuruni ho penn gant *Eskop Kernevix* !

D'ann daoulin, *Bugale Breiz*, hastit, d'ann daoulin holl,
Chetu erru eba ho touez, *Gwerc'hez sakr Remengol*,
Ha gwelit e-dro d'ezhi, gant pebr a c'houlouen,
Ouspen daou vil blac'h iaouank, leun a joa hag e gwenn !

Ha breman, dirag ann trouen war ann huel savet
Evit kuruni hor Mamm p'hini garimp bepret,
Sellit ann Aotrou n'Eskop enn orezoun war-n-han ;
Kent evit oferenna he ra ar beden man :

- Me ho ped, *Gwerc'hez santel*, *Patrounez Remengol*,
- Pedit evit-oun hirio, hag evit ar bed holl,
- Evit ar belerinet zo aman a bep bro,
- Ha d'ann anaoun hirvouduz torit he chadennoù. •

N'oun ket evit niveri ann dud a oa eno ;
Ho daoulagad a welenn, gleviet gant ann daërou,
Troet holl ouc'h ar *Werc'hez* evit goulenn remet
D'ar boan ha d'ann trubuillou, war hent ann den badet!!!..

Neuze, evel *Gabriel* pa saludaz *Mari*,
E teu hon *Eskop* santel evit he c'huruni ;
Enn hano ar *Pab Pii Nao* hel laka war he fenn
Eur gurunen ar gaera ! *Pebez* joa, kristenien !!!

Kerkent ann heol dudiuz a lamp teir gweach en aer ;
Eur c'helc'h aour e-dro d'ezhan gant respet her gweler
O *Saludi* ar *Werc'hez*, *Rouanez* kurunet
Da gement a zo krouet, dreist holl d'ar *Vretounet*.

III.

Breman pa-z-eo kurunet Patrounez Remengol
Tostañt c'hoaz d'am c'hlevet, c'houi kristenien deot ;
Ha me lavaro d'eoc'hu darn diouc'h ar burzudou
A zo great enn he Iliz e-tro pad he gweliou :

E Braspartz e zo eur vamm evuruz braz meurbet ;
Leac'h kalz he deuz da veza, pell eo bet ankeniet :
He merc'h, plac'h iaouank ha mud, hirio e Remengol
He deuz, dre c'hraz ar Werc'hez, komzet dirag ann holl !

E Krozoun e zo eur plac'h, laouen ha skanv a droad,
Hag a oa bete-vreman hep ober eur gammad ;
Digaset da Remengol da c'houlenn ar c'herzet
He ped er *Plas ar Salud* hag he-z-eo selaouet !

Eunn aotrou a Vontroulez, enebour da Zoue,
(Abaoue he bask kenta he vantro he ene)
Dont a ra da Remengol evit e n'em didu ;
Mar distro ouc'h he Zalver, petra a lorfot-hu ?

Pa wel ar prosesioun o tont diouc'h ann Iliz
He stou ive d'ann daoulin evel ma ma ar c'hiz,
Mez Mari, en eur dremen, a domaz he galoun :
Da noz he oe absolvit ; da Zoue eo mignoun !!!..

Eur bugel a Vontroulez en deuz bet ar c'herzet ;
Eunn all, diwar eur voger, war ar ru zo kouezet,
He lamm a ugent troadet a dlee he laza ;
Mez gwestlet da Remengol, n'en deuz santet netra !!!..

Er barrez a Lok-Henvel, e-kichen Koat-ann-Noz,
E zo c'hoaz eur plac'h iaouank ne ve gant-hi ker koz

Nemet euz a vurzudou Patrounez Remengol
He deuz c'harzet he spered da vont pelloc'h da goll!..

Deiz lun Pask ar Pentekost ann avel a oa fol,
Ha pemp den enn eur vagig a iea da Remengol ;
Sonjal a rejont mervel dirag Landevennek,
Mez Gwerc'hez sakr Remengol a glevaz he c'hloarek !.. (1)

Kerkent he weljont Mari enn he zao war he zour ;
He dourn gant-hi astennet war ar pemp beajour :
Pellaat a ra ann avel, ar mor a goll he nerz,
Hag a lez ar vag vihan da ruillal war-n-han serz !!!..

Kalz a vurzudou all en deuz great ar Werc'hez ;
Hol lavaret holl aman a zo tra re diez,
N'en deuz hini ac'hanoc'h ne gredfe kement-se,
Rag bet oc'h euz digant-hi eur c'hras bennag ive !..

D'ann daoulin, d'ann daoulin holl, ha pedomp hon Itroun
Da vinniga ac'hanomp. Pedomp-hi a galoun
Hag he skulio he bennoz war holl dud Breiz-Izel,
Ha war ar re zo eat d'imp d'ar vuez eternal !!!..

Miserere mei, et exaudi orationem meam !....

(1) Kloarek Remengol.

Great gant kloarek Koat-ann-Noz, ha kinniget gant-han d'he
vignoun ker kloarek Remengol.

Goude beza roet da iliz Remengol eunn niver braz a induljansou ha grasou ar re gaera, hon Tad santel ar Pab Pie IX, en deuz c'hoaz digaset d'an Itronn Varia Remengol eur gurunen aour ha perlez, evel eur merk a desteuï d'ann holl dud a galoun hag a feiz, deuz ar garantez vraz en deuz evit-hi ; dre eur skrit abostolik, roet e Rom, enn iliz Sant Per, ann 8 a viz mae, 1857, en deuz karget ann Aotrou *Renan-Nikolaz* SERGENT, eskop a Gemper hag a Leon, da guruni, enn he hano, ann Itronn Varia Remengol ; kurunen aour ha perlez ann Itronn Varia Remengol eo ar gaera a zo bet gwelet biskoaz e Breiz-Izel ; he zaolen, pe he imaj, a weler enn holl diegezou Breiz-Izel ; ar Vretounet, darn war ar mor, darn e kreiz tan ar brezel, ha darn all e tru-buillou ha poaniou ar vuez, a zoug, gant feiz, he medalen, war ha c'haloun ; ha pa zeu Doue d'ho gervel, he varvont enn eur bokat, gant fiziañz, da vedalen *Rouanez* braz Breiz-Izel, Patrounez Remengol.

Beb pemp bloaz e vezo douget, e prosesioun, ann Itronn Varia Remengol, evel ann deiz ma-zeo bet kurunet, hag ouspenn, enn amzeriou a *vrezel*, a *gernez* hag a *vosen*, ann Itronn Varia Remengol a zeuio c'hoaz er meaz he *falez* evit distrei divar Breiz-Izel, hor bra ger, ann holl goalennoù a hellfe noazout d'he bugale.

